

n 9



# CANTIC SPIRITUEL

*En henor da Sant Laurans, var ton :  
Mission Cavan.*

**J**ESUS, Salver ar bed, roit din oc'h assistans  
D'ober ur c'hantic nevez e gloar da Sant Laurans,  
Eus ar Martyret Santel unan ar re quenta,  
Protector bras da guement en deus recours deza.

Un AEL a dleffe certen quemeret ur blien  
Evit scrifa en aour dirac ar Gristenienn

Ar Vuez ar Miraclou demeus a Sant Laurans,  
A dle beza publiet par-tout dre ar Franç.

Sant Laurans pa oa yaouanc a guitteas he vro,  
He guerent, he vignonet, hac ive he vado,  
Hac e Rom en em rentas da servicha Doue,  
Leun a furnez, a brudanc, hac ive leun a fe.

Eus a Spagn oa natif Sant Laurans, den vaillant,  
Den brao, leun a speret, douç, humbl, chast a savant,  
Den patient, den sobr, hac ive den cordial,  
Leun a garantez Doue, courachus, liberal.

Ar Pontif ar Pap Sixt en cavas quen parfet,  
O velet oa savant, capabl da veza belec,  
En reas Archidiacr, hac ive Tresorier,  
O velet oa da Zoue ur fidel servicher.

An Impalaër Hyldrote, hanvet Valerien,  
A ioa un tyrant cruel, a laze ar Gristenienn,  
Par-tout o fersecute abalamour d'ar'Fe,  
Evit gallout o c'hontraign da renonc da Zoue,

Bras oa ar persecution a re en o andret ,  
 'Ar Pontif , an Tad Santel memes oue quemeret ,  
 Ha conduet d'ar prison gant fallagriez bras ,  
 Ha Sant Laurans pa glevas var he lerc'h a redas .

A ziabet e lavaras d'hon Tad Santel ar Pap ,  
 Mont a rit-u , emezan , da vervel hep ho map ?  
 Me a ranquo sur mervel gueneoc'h pe en ho plac ,  
 Prest oun da scuilla va goad evit Doue dre e c'hraç .

Ar Pap Santel pen clevas , a respontas dezan :  
 Va map , quemerit couraich , e ber amser aman  
 C'hui a souffro tourmanchou vezo bras ha cruel ,  
 A rai henor da Zoue , d'ar bed universal .

Neuse en er briatas , en eur brophetiza ,  
 C'hui vo eus ar Merzerien unan ar re vrasa ,  
 Ho curunen vezo caër meurbet ha glorius ,  
 C'hui a drec'ho an Tyrant , c'hui vo victorius .

Moes distribuit brema , pen doc'h an Tresorier ,  
 Quent ma viot quemeret evit beza prisonnier ,  
 An oll tensoriou oc'h eus d'an dud clan ha paour ,  
 Tensoriou spirituel a so guell evit aour .

Sant Laurans incontinant hac er berra amser  
 'A zistribuas neuse var ar Moes hac e Quer ,  
 Bete dindan an douar , ebars er volzenno ,  
 E clasque ar Gristenien a ioa cuzet eno .

Hac un nombr bras a gavas infirm hac affliget ,  
 Darn privet eus ar c'herzet , darn all eus ar guelet ,  
 Sant Laurans o recevas , oll e ouent consolet ,  
 Ha streguet an alusen , o devoa ar yec'het .

Moes quent m'en devoa clasquet an oll dud affliget  
 E oue souden quemeret , er prison ranfermet .  
 Heuliomp brema Laurans , demp ganta d'ar gombat ,  
 Ny a velo he gouraich , prest e da scuill he c'hroad .

Treinet e oue neuse da balès an tyrant ;  
 Hac a c'houlennas ounta calsa aour , a arc'hiant :  
 Sant Laurans a respontas , moes gant eur furnez vras ,  
 Roit din daou pe tri de , m'o rento var ar plaç.

En diligeañ e reas un eil perquisition ,  
 Dan glasq an dud impotant a ioa en affliction ,  
 Hac o c'hargas e quirri , a ioa roet dezan ,  
 Da lacat an tensoriou a c'houlennet ountan.

An Impalaër pen guelas a oue coleret bras ;  
 Me a vel emezan , ne rez nemeur a gas  
 Demeus an oll tourmanchou a so dit preparet ,  
 En defaut na renonces da Jesus crucifiet.

Laurans a respontas gant couraich ha constanç :  
 Nemeus nac aon na spont demeus da oll buissanç ,  
 An tensoriou a glaskan a so placet en Eê  
 Dre dourn ar beorien-se , guir memprou un Doue.

An Impalaër e coler , souden a ordrenas  
 Ma vise en he bresanç souden laquet en noas ,  
 Gonde gant pevar bourreo a daouliou scourgezou  
 En lequejont hep truez e goad , e gouliau.

C'hoas gant crifinou houarn , evel pa vise dir ,  
 E oue dispennet he gorf hep ma lavaras guir.

An Impalaër pen guelas , a lavaras dezan :  
 Te so ur magicien , brema sur er guelan.

Meulet ra vezo Jesus en Eê hac en douar ,  
 A ro ners din , eme'r Sant , da souffr evit e c'hloar ;

Me a varvo evinta eus a greis va c'halon ,  
 N'en deus nemet un Doue dign a adoration.

Neuse gant querdin plomet e oue oll meurtrisset ,  
 Ma gant flamboziou ardant ive oue tourmantet ,

Gonde var pevar pillier e oue gantan laquet ,  
 Gant crifinou houarn he gorf peur-dispennet.

En he dourmant Sant Laurans a selle ous an Eê,  
 Hac a c'houlenne pardon ha sicour ouz Doue ;  
 An oll gantan a glevas abers Doue eur vbuez :  
 C'hoas e viot eprouvet evel an aour er fornies.

Me rai, eme an tyrant, cresqui da dourmanchou,  
 Ma na gueres adori brema an Idolou ;  
 N'o poquet diguenen ur moment a repos,  
 Me a rai dit anduri hac en deiz hac en nos.

An nos, eme Sant Laurans, so din evel an de;  
 Te so en tevaligen hep carantez Doue :  
 M'en em gues eurus da souffr tourmanchou bras  
 Evit Jesus, va Salver, a so maro er graos.

Va zourmanchou, emezan, en devezo ur fin,  
 N'emens nac aon na spont dre ar c'hraçou divin ;  
 Deus, Tyrant, da invanti tourmarchou a neve,  
 Ar rest demeus va buez a so c'hoas da Zoue.

Erfin var ur grill houarn e oue ganto laquet,  
 Ha dindan ar glaou ardant evit bezan grillet ;  
 Ar Gristenien a ioa eno oue epouvantet  
 O yelet he dourmanchou hac he patientet.

Dar bourrevien e laras gant un douçder ingal,  
 Pa oa grillet ur c'hostez e drei er c'hostez all :  
 Mar queres, tyrant cruel, contanti ta furol bras  
 Tro va c'horf, hac e tibri eus ar c'hostez so poas

An tan a ioa violant hac an tourmant quer bras  
 Ma rede en abondanç ar c'houez dioc'h e faç ;  
 Ar Gristenien ioa eno a grie bete'n Eê,  
 En a c'houlenne pardon ha sicour ouz Doue.

Pa oa eno Sant Laurans var ar grill o lesqui,  
 E tisquennas eus an Eê un AEL d'he gonsoli,  
 Visiblement oue guelet gant ur mouchouer guen  
 O sec'ha he gouliou hac ar c'houez dioc'h he beñ

Un nombr bras a Bayanet a oue convertisset ;  
 Moes an Impalaër cruel , he galon caledet ,  
 A deu d'en em retira ha da vont gant he hent ,  
 Evel un den possedet en eur strinqual he dent .

Sant Laurans victorius a rentas he Ene .  
 Canomp dezan canticou , ha meulomp oll Doue ,  
 En deus gret Sant Laurans meleour eus ar Fe ,  
 Protector bras d'an Ilis en Donar hac en Ee .

E departamant Guengamp , en Escopti Treguer ,  
 Vardro ul leo hac hanter eloignet eus a Guer ,  
 So un Ilis dediet d'an autrou Sant Laurans ;  
 Imploromp en hor poaniou bepret he assistanc .

C'hui so brema , Sant Laurans , o possedi ar gloar ,  
 Ny so ama pec'herien , e riscl var an douar ;  
 Sellit ouzomp a druez , a galon ny ho ped ,  
 Grit ma vezo hor peden gant Doue exaucet .

O Doue , oll c'halloudec , c'hui en deus roet ar c'hraç  
 Da Sant Laurans da drec'hi an oll tourmanchou bras :  
 Grit deomp , en Hano Jesus , laza tan ar viçou ,  
 Hac hon grit participant eus a c'hraç en Evou .

## CANTIC NEVEZ

*Var maleuriou en deus gret an tan goal  
 hac ar gurun , er bloaves mil seiz cant  
 pevarzec ha tri-uguent , en Leon , hac en  
 cals a blaçou-all , var un ton nevez .*

**C**HRI<sup>STENIEN</sup> a Christeneset ,  
 Bezit attantif da glevet  
 An nombr bras a maleuriou  
 Gant an tan goal ar gurunou .

Nombr bras a tud so perisset,  
 Siouas ! dre valiç an droug speret,  
 Defot da doubla or fedennou  
 Da Jesus hor guir Aoutrou.

Doüe control da tud ar bet,  
 A gar beşa importunet ;  
 Mœs ar re ne credont quet enna,  
 Ne vanq james d'o funissa.

Clevet un exempl, me o ped,  
 Ebars en Leôn arruet  
 Gant u c'hrouadur daouzec vloa,  
 Casset d'an naot da vesina.

An deçvet a vis mae,  
 E voa gasset e vreur hac e ;  
 Carguet a joa en o speret :  
 Allas, siouas ! na sonjent quet.

Er plaç ma voa deso destinet,  
 Souden ezint en em rentet ;  
 Mœs Doue squiz ous o guelet,  
 En deus o, siouas ! perisset.

Un tan gurun eus an Eê  
 En deus en grillet er plaç-se,  
 Heb no deus gallet resista  
 Demeus ur maleur evel ouma.

E corf e zillat ol losquet ;  
 He vreur a voa quen epouvantet,  
 Hac a crias, Santes Barba,  
 Va a preservit ebars er bet-ma.

Ar men gurun a voa ganta,  
 Hac a preservas aneza ;  
 A neb en dougo gant respet,  
 Her bed-ma a vo dilijret.

Pedomp eta Santes Barba

Dar preservi ebars er bed-ma ,

A dougomb ivez gant respet

Ar mein gurun-ma biniguët.

Clevit un exempl , me o ped ,

Er guer a Voulogn arruët ,

Ar c'houezecvet a vis even ;

Me o suppli oll da gompren.

Ar seizvet e voent avertisset

Gant ur liser a beurs an Dreindet ,

Da redoubla o fedennou

Da Jesus or guir Aoutrou.

Moes a ben ar c'houezecvet devez

E voa cals a tristidiguez ,

E voa guelet cals maleuriou

Gant an tan goal ar gurunou.

Pa oant o cana an oferen bret ,

An oll Christenien assamblët ,

Gant peb enor a peb respet ,

D'adori Jesus crucifiet.

Un tourmant bras a so savet ,

Dre tan ar gurun alluhet ;

Quement voa er plaç voa resolvët

Da goulen pardon ous Doue.

En Ilis e antreas ,

Nombr bras a tud a loscas ;

An oll certen a voa spontët

O velet maliç an drouc sperët.

Ar celebrant deus an Auter ,

A consacr e Corf or Salver ,

A so bet distroët ounte ,

Gant douçder a lavaras deze.

En em prosternet dan daoulin  
 Dirac ar rajeste divin ;  
 Goulennit pardon , me o ped ,  
 Digant Jesus crucifiet.

Goulennit ivez er bed-ma  
 Sicour digant Santes Barba ;  
 A dougit ivez gant respet  
 Ar mein gurun-ma biniguët.

En Escoptia a Querno,  
 Ar pevarzec a vis mae ,  
 Seiz a cant a so beüset  
 Gant an delug dour dimeret.

Pedomp eta Santes Barba  
 D'hor preservi ebars er bet-ma ,  
 Demeus an tan goal ar gurunou ,  
 Redoublomp oll hor pedennou.

O va Jesus , Salver ar bet ,  
 An oll a c'houlen ho requët ,  
 Evit ma veont pardonnet  
 O touguen ar men biniguët.

Tout e clevan ar Christenien ,  
 O redoubla o feden ,  
 M'or bo ar c'hraç goude ar maro ,  
 Da veuli Jesus en Eevo.

F I N.